

gw 305 k

# CHANSON AN TRIVAC'H PLANEDEN

*Var ton Cloarec Pempoul.*

**M**am be eun tam amzer, pluen, liou ha paper,  
Squent evit merea, var ben, nebeut amzer  
Me rafe eur reglen var goal blaneden,  
Demeus ar c'haëra fleur en em donn da drezen.

Qent avanç davantach e teuàñ da c'houlen  
Sclérijen ha graçou an trivac'h planeden,  
Pere a c'houarn tout oll izili an den,  
Eus a guement a ra hac a ell da gompreñ.

Artez eo ar guenta eus ar blanedennou,  
Cuti dre breferanç e c'houlennan graçou ;  
Rac hep caout he graçou ne oufet qet compren,  
Pa zeo hi a c'houarn ar speret hac ar pean.

Pa deu din da sònjal en amzer dreñenet.  
Ha laqat va memor en hini da zonet,  
Va c'halon a lar din, mantret gant ar glac'har,  
Birviqen va repos n'em bo var an douar.

Breinàn me ziscléryo ebars en abreje  
Va flaneden galet tremenet em bue,  
Evit an effejou sur na recitin qet,  
Va c'halon, pa zònjan, a zo cazi ranne.

Abaoue ar moment ma zé bet unisset  
Va ene gant va c'horf, e voa predestinet

Gant Doue pen-da-ben ar suit va flaneden  
Va brassa plijadur a raje din anqen

Aboe m'òn er bet m'an, me a ell lavaret  
Qement seurt plijadur zo ganén éruet,  
A zo bet mizerabl ar fin eus aneze,  
A scòe em c'halon evel lanç pe gleze.

Me meus bet an amzer, ia ne zeus qet pell,  
Ma velen em jardin fleuriou caer o sevel ;  
Er fin, me zo tromplet em oll bretantion,  
Ne meus nemet picou da biea va c'halon.

Ar choezec a here eo tremenet ar bloa  
E rencontris eun den pa voan o studia,  
Pehini am pedas da vont d'en assista  
Betec eur plac citet vit va sanctifia.

Pa voeinp éru er plaç piñi voa assinet,  
Eur femelen yaouanc e deus va decevet,  
Hac a rentas eno va c'halon languissant  
Gant e zellou mignon hac e c'homzou charmant.

Va saludi eure gant güir humilite :  
Piou oc'h-u, den yaouanc, nac eus a bez confre ?  
Ha me respout dézi ebars en eur guer bêr :  
An neb en deus dezir da vont ho servicher.

Excusit, den yaouanc, eus ar vadelez-se,  
Rac ne veritân qet an enor-ze :  
Mes pa rit din' enor d'er bea annoncet,  
Bezet grêt em andret evel a leveret.

Azeit, plac h yaouanc, cetu'r scabel aze,  
Vit ma clêvin ganêc'h eun dar eus ho toare.  
Me garfe, plac'h yaouanc, e larfac'h din bremân  
Ha me a zo d'ho crad evel m'en dezirân.

Eleal, den yaouane, me a ell lavaret,  
Abaoue ar moment ma meus bet ho quielet,  
E zoc'h sur an objet hervez va fantazi,  
Ne zeziran netra nemet' vec'h fidèle dîn,

Arça ta plac'h yaouanc, me a guemer conje,  
Eus ho pedi da chom bars er zantimant-ze.  
Bet dîn-me carante evel ma zo dleet.  
Ha m'ho caro ive gant honor ha respect.

Bet persuadet mad eo güir va freposiou.  
Ne gredit qet an dud gant o goal deodadou ;  
Hac evit prouvi dée'h en ho caran parset,  
Ho pedan da retorn ha qenta ma elset,

Me ya joaüs eur vech bete ty va mestrez,  
Tenzor eus a sqient rouanez a furnez ;  
Hi eo sur va frances, hac e deus carante  
Evit he servicher dre güir sincerite.

Bonjour dée'h va mestrez rouanez ar merc'het  
Ho saludi a ran gant honor ha respect,  
Dre ma zoc'h eun objet hervez va fantazi,  
Eur rozen quer brillant evel ar fleur de ly.

Ha dée'h parcellamant den prudent ha den sur  
P'o quylan o tonet, e meus calz plijadur.  
Clévet e meus abaoe e voac'h eun den savant,  
Mes bremàn ho credan p'o clévan parlant.

Me garfe, va mestrez, nac e lavarfee'h dîn  
Ha me a zo d'ho crad ive d'ho fantazi,  
Ia, va servicher, c'houi a garan parset  
Dreist qement den yaouanc a zo sur var ar bed.

Maq ouffen, va mestrez, le ve güih qementsc.  
E yen sur an objet demeus ho darante,

Me ho recompansfe demeus a guémentse,  
Hac e vemp unisset dre ar c'braç a Zoue.

Eleal, va zervicher, mad ec'h ellit credi,  
Me rose va bve evit caout hoc'h hini ;  
Credi, va zervicher, ia, pa en touan,  
Pa gafen mad eur princ, bijen dêc'h ne vancan.

Va speret zo troublet pa sonjan, va mestrez,  
Hac a ra din credi e zoc'h godisserez ;  
Mes ne grefen bijen e verc'h capabl da ze.  
Mervez ma tiscleryit aman ho carante.

Mes donet a ran c'hoas da lapat va speret  
Hervez va fantazj da garet eun objet  
Pehini marteze a rai din mil hirvoud ;  
Va bue, va maro a zo en e galloud,

Bet persuaded mad eo gôir a layaran ;  
Guell va ganén mervel eguet ho trahissa.  
Mat ec'h ellit beza en assuranç var ze ;  
Me varyse evidoc'h, hac em be mil bue.

Pa zellân eus ab eol o commando izellat,  
Eru eo an amzer ma za poent o quitât,  
Me meus ques da netra nemet o'allan lezel  
Va c'halon evit test d'am c'harante fidel.

Eus a greiz va c'halon, den yaouanez, me/ho ped  
Da né torn adare ha qenta ma elset ;  
Hir a cavin' amzeit hep clèvet ho toare  
Qen am bo ar boneur d'ho quelet adare  
Me ya c'hoas et o'veach c'hoas he doare,  
Dre m'e deus ranfermet va c'halon er prison,  
Dre zellou charmant hac he c'homzou mignon

Bonjour dêch'va mestrez, rouanez va c'halon,  
Oll studi va sqiant, va c'honsolation ;  
C'houi eo dra certen mui tra a garanq ouï.  
A guement zo crout gant Doue er bed-mân.

Me rent d'ech' ar zalud ive, va zervicher ;  
Abaoue meus ho cüelet e zeus calz a amzer ;  
Dislavarat a râne ar pez meus lavaret,  
Dre eur gôncclusion a zo deut em speret.

Va speret ha va c'horf zo em gonsultet,  
Ha en disfin va zònj e meus bet remerqet  
Penos ne voan qet grêt evit an demezi,  
Hac abalamour dêch'le meus calz a anoi.

Qemerit va mestrez, eul lanç pe eur c'hlez  
Da dreuzi va cihalonq m'ho pezo va bue,  
Ha ne lavarit qet eur gomz evel houanes,  
Goude ho peza grêt em c'halon rouanez.

Mes c'houi deun adscient ha ivel a brudanç,  
A ello e lêch' all poursu er vad ho chanç;  
Bet persuadet mat ma vijen destinet  
Da gavet servicher em bije ho choazet.

Houanes an bromessa ho poasta din the grêt  
Divea m'am boe bet an enor d'ho quelet ?  
An ên hae han douar zo test ar güi Doue  
Me ho lès da juji demeus ar virione

Evel eun ouades a ve'creiz ar mîr bras  
On beuzet em daëlou, o sönjal em disgrâç,  
O velet an dissign demeus va flaneden,  
Chanchet demeus a ros ebars en eur spernen.  
Qent eguet achui, e meus c'hoant lavaret  
Eun jdaou pe eun tri guerien profit ar voaset,

Dre ma zeus cànjolet ebars en beq[ue]l qartier,  
Ze'ra dîn lavarât an dra-ze a zo selêr,

M'ho ped, potret yaouanc pere abron er bed,  
Ne fit birviqen en préposiou merc'het oug.  
Ar promessaou caen a nij eveltar pell,  
Pa zònjer nebeuta a ra gant an ável.

Güelet a rit amân dre pez seurt promesse  
On me bet recevet gant ar femelen-ze  
Coulç a me, yaouanqis, c'houi ell beza trompet ;  
En pad ma oc'h abret, me ho ped dioüallet,

N'em en fit quet re var ho tescadurez,  
Balamour oc'h den brao ha cågues a furnez ;  
Me am boa deus an eil, ha demeus eguile  
Hac a zo tromplet o're fiout enne.

Dre ma vóan yaouanqic, aïlas ! ne vouien qet  
Ar fècon da zisput gant godisseret ;  
Gant o zellou charmant hac o c'homzou q'en douç  
E laqont eur galon da veza amourous.

Rac-se potret yaouanc, teulit eves ounte  
Me ho ped da gredi gant ped seurt güirione !  
Eur plae'h mar dê penn scàn, a rayo ho maleur,  
Mes, mar dê coant a fur e rayo ho ponneur.

---

## CHANSON NEVEZ

Var sujet eur Bassagerez hac eun den yaouanq

Var eun ton nevez

Pelec'h it-u, passagerez, gant ho paguie vian  
D'en eun risca var ar mòr evelse oc'h-unan  
Ho pisach hac ho genet zo quer caër, quer brilanl

Evel an eol beniguet a zo er firmamant.

Ha rac-se ta, Isabel, va douç, va c'harante,  
Va ambarqit en ho pag, ma zin ganêc'h ive ;  
Va brassa contantamant ha val plijadurez  
Eo naviga ganêc'h-u var ar môr assambles.

Petra ê ar c'homzou-ze oe'h eus lavaret din ?  
A ya bete va c'halon hac a fra anvi din  
C'houi marteze a zo deut evit godissa,  
Pe evit clasq ar fêçon da ellout va zrompla.

Me zo eur plac'hic yaouanc oajet a bemzec vla,  
Hac a meus calz da zioüal n'arufe d'n'netra.  
Rae calz demeus a blac'het a m'eus güelet tromplet  
O tonet da re fioul en comzou ar voaset.

C'houi ê certen ar fleuren eus an neve amzer  
Ablij sur d'an dud yaouanc amân dre ar c'hartier  
Mes m'am be-me ar boneur da vea d'ho fantazi,  
Me en em gafe eürus certen dreist pepini.

Me a zo eun den yaouanc a gar beo secret,  
Ne qet bet biscoas em sonj da c'holissa mere'hed  
M'ellân antren en ho eraç hac en ho carante,  
Me ho caro, va mestrez, gant peb fidelite,

An nep a deu re vuand da gredi d'ar voaset,  
Lies plac'h a zo tromplet siouas eus o c'hêvet  
N'en dê quel avoalc'h caret bea anaveet,  
Rac ar voaset zo tromplus alies d'ar merc'hed.

Eur plac'h a goñ heñenor zo atao maleüros;  
Offanci a ra Done, collet eo he vertus;  
Mes diveat voar goude da zonet da vouela :  
An enor, pa ve collet, n'eller mui da brena.

Ne qet vit coll hoc'h enor hae ho virginite.

Emeus-me sur, plac'h yaouanc, qemeret liberté ne lez  
Da zont da c'houlen ouzec'hia c'houi vije contant  
Da zonet d'am ambarqiebarscho patjmant,

Ma rit din-me an enor da zont embatimant,  
Var ben nebent a amzer ni vo hon daou contant  
Ni labouro nôs ha dé qen a vezimp rentet  
Bars er plaç va mestrezic oc'h eus design monet.

Avancit-ta, den yaouanc, hardi em batimant,  
Rac demeus ho prepoziou en em gavân contant ;  
Ho talant hae ho fêçon hae ho comzoù charmants  
A laqa em c'halonic calz a gontantamant.

Benigomp-ta an istanteus hon ambarcamant  
Me ho car, va zervicher, gant eus galon ardant,  
Hac am bezo evidoc'h pep seurt fidelite,  
Birviqen dêe'h ne vâncan qeit ma vin en bue.

Eleal, va mestrezic, noc'h eus netra colleti  
Me ho caro ive sur gant enor ha respet,  
Hac am bezo evidoc'h ar memes carante  
A oufoc'h caout evidon bete fin va bue.

Va mestrez quer, préparomp entre ompniao  
Da gomanci da renviait entrezec hae hor bro  
Hac eno, pa vimp rentet, e vezimp assuret,  
Rac ar môr a zd traitour ; siout ennânn n'aller qetelq

Rac-se eta tud yaouane, qet eguet finissa  
Deut eta d'en em garout vel ma rî an daou mât  
Hac ho pezo plijadur an eil gant eguile,  
Mar bevit mad assambles dre eur güir garante.

FIN